



Teste: F. Guéguen

# An Eal hag an Ene.

## I

Eun eal, eun deiz, a lavaras da m'ene :  
 « Oh ! ma ouffec'h pegen kaër eo an ee  
 » Oh ! ma velfec'h ar sklerijen beursked  
 » A-skuill varnomp hor mestr oll-galloud  
 Respount a ris : « Braz meurbet eo ho tudi  
 » O velet Doue splammoc'h eget an de ;  
 » Mæs n'ouzoc'h ket peger braz eo en hosti  
 » He garante. » (*teir gwech*)

## DISKAN :

An env ! An env eo ho pro, vel va hini  
 Meulomp hon daou Doue ken kaër, ker mad !  
 D'in-me an env ! D'in me Jezuz en hosti ! (*dion vech*)  
 Na dudiuз eo hon loden, hor stad ! (*dion vech*)

## II

« Ha koulskoude ho Salver muia karet  
 » Var an oter ouzoc'h a jom kuzet ;  
 » En env ni 'r gwell tal ouz tal er sklerijen  
 » A darz outhan ker puill azioc'h hor penn. »  
 Respount a ris : « Gwelet a rit Hor Zalver  
 » Er baradoz kaër meurbet var he dron ;  
 » Mæs n'hoc'h eus ket an honor d'hen digemer  
 En ho kalon. » (*teir gwech*)



### III

- « Ama c'hui zo 'vel ar gliz var an delien :  
» Eun ezennik ho tisken er vouillen,  
» En eny ni vev dispount tre ha dizourci  
» Dre c'hras Doue ne c'hellomp mui pec'hi. »  
— « O eal santel, nan, morse n'hoc'h eus tec'het  
» Pell dioc'h Dote da heul ar gwall-ioulou ;  
» Mæs ken neubeut, dioc'h an dol-zakr daoulinet,  
» Skuillet daëlou. » (*teir gwech*)

### IV

- Neuze an eal goustadik a zisplegas  
He ziuaskel etrezek an oabl glaz :  
Pignit ganen, rak ato var an douar  
« Ho levezez hen do blaz ar glac'har ».  
— « Esper am eus, o mignon karantezuz,  
» Gwelt, eun devez, evelhoc'h va c'hrouer,  
» Mæs, da c'hedal, dous eo beva gant Jezuz  
» Tost d'an oter. » (*teir gwech*)

